

XIV

Daou zervez e veler savet — [Sant Yan
Varzu ennoc'h mil breac'h goalc'het —
Gant an dour euz an eienen;
Lod all her'skuill en o c'herc'henn.

XV

Peb pelerin goude raktal
A gas ar chapeled d'e dal — Sant Yan —
Rag a ra teir zro d'ho chapel
'Vit obten e vennad santel.

XVI

Gwelit: ne baouez d'ho pedi;
Badezour eürus ar Messi — Sant Yan —
Varnan grit eur sell a druez;
En han Doue, klevit e vouez.

XVII

Skuillit bennoz var bep hini
'Zo bet hirio ouz ho meuli — Sant Yan —
En o buez, var o maro
Kemerit soursi anezo.

XVIII

Ma z-eo dalc'het er Purgator,
Da vogel Plouvian, roit skor — Sant Yan
'Vit ma nijo pur ha santel
Varzu an env, a denn askell.

Imprimerie, 4, rue du Château - Brest.

DOUE HA BREIZ BEPRED

PARREZ PLOUVIAN

KANTIK SANT YAN - VADEZOUR

Diskan :

Em banner bras ar binijen
Hirio selaouit hor peden — Sant Yan —
Karet hoc'h bet gant Hor Zalver
C'houi 'zo profet, c'houi 'zo merzer.

I

Etouez bugale ar merc'hed
Biskoaz ne-z-euz ket bet kavet - nikun -
A ve brasoc'h eget Sant Yan,
Jezuz hen lavar e unan.

II

Yaouankiz c'hoaz el leac'hioù gouez
Hoc'h het kaset gant an elez - Sant Yan
Pell diouz an dud, tost da Zoue
C'houi ' jomas pur korf hag ene.

III

Na rust eo bet ho pinijen,
Kroc'henn kanval en ho kerc'henn - Sant Yan
Biskoaz na gwin, na tamm bara :
Grisiou c'hoero evit beya.

IV

Dre nerz ho mouez eil Elias
 An dezert oll a dregernas — e reas —
 Kalz pec'herien 'deuas d'ar Jourdin
 O skei gant keuz var o feultrin..

V

Setu Jezuz, Salver ar bed
 O tont da veza badezet — Jezuz —
 En er grena e skuiljoc'h dour
 Var benn ho Mestr, Yan-Vadezour.

VI

Ma krenit dirak Mestr ar bed
 Dirak an dud ne grenit ket, - Sant Yan -
 Tavit, tavit, tud digaloun
 Ar profet bras n'oar ket kaout aoun.

VII

« Selaou Herodez te 'ra fall
 » Derc'hel ganez pried eun all: — selaou
 » Varnot ha varni eb dale
 » E pouezo dourn justis Doue. »

VIII

Eur c'hreg gant he merc'h danserez
 A reaz d'eoc'h-hu koll ho puez - Sant Yan
 Malloz d'an danz ha d'ar viscu
 Goad hag ifern ouz o seuliou !

IX

Var eur plad e kreiz eur banked
 Ho penn santel 'oue digaset — Sant Yan
 « Sell ouz penn Yan, Herodez kriz
 » Ar penn-ze a veli noz-deiz ! »

X

Mervel zo berr, dir ar c'hleze
 D'ar merzer 'oue alc'houez an env - e oue
 Na c'houi zo kaer e lez hon Tad
 Badezour, badezet er goad !

XI

Ama gwechall kaera chapel
 A c'houdore an dud fidel — Sant Yan —
 Diredet euz a dro var dro
 Skuiz maro ar c'halz anezo.

XII

Ar skuizder-ze n'eo ket padus
 En ho kichen, mignon Jezuz — Sant Yan
 Dour ho feunteun 'dorr ar sec'hed,
 Ha d'an izili 'ro 'r yec'hed .

XIII

A veac'h ho pardon 'zo digor
 Ma z-eo rentet tud an Arvor; - Sant Yan
 Ho feunteun 'zo ganto kelc'het
 Daoulinet oll, o fenn stouet.